kel.12, 13, 18. gw. R.H. morhoc'h; A.B. R535. g. mar-  
souin.
- { rinkin (l. rinkined) anv gourel. kel.18 (Douarnenez).
- { rekiñ(ed) anv gourel. kel.3, 4. gw. A.B. R246. g. requin.
- spiner (l. spineged) Squalus canthias. anv gourel. kel.5,  
12. gw. A.B. R242. g. aiguillat.
- morc'hast-glas (l. morc'histi-glas) Glyphis glaucus.  
anv gwregel. kel.18 (Douarnenez). gw. A.B. R236.  
g. peau-bleu.
- { gast (l. gisti) Galeorhinus galeus. anv gwregel. kel.12.
- { al (l. aled) anv gourel. kel.3, 4, 5, 6, 10, 11. gw. A.B.  
R234. g. há.

- { touilh (l. touilhed) Scyliorhinus canicula. anv gourel.  
kel.3, 4, 5, 6, 10, 11, 12.
- { touilh-rous (l. touilhed-rous) anv gourel. kel.3, 4, 10, 11.
- { kazh-rous (l. kizhier-rous) anv gourel. kel.18 (Douarnenez).  
gw. A.B. R231. g. petite roussette.
- { touilh-ormelaer Scyliorhinus stellaris. anv gourel. kel.12.
- { ormelaer (l. ormelaered) anv gourel. kel.10, 11. distaget :  
ormeler (pouez -mouezh war ar silabenn diwezhañ).
- { touilh-bras (l. touilhed-bras) anv gourel. kel.3, 4. gw.  
A.B. R232. g. grande roussette.
- aël-mor (l. aeled-mor) Squatina squatina. anv gourel. kel.10,  
11, 12. gw. A.B. R245. g. ange de mer.
- rae (l. raeed) anv gwregel. kel.3, 4, 5, 6, 10, 11, 12, 18.  
gw. A.B. R247. g. raie.
- rae-du (l. raeed-du) Dasysatis pastinacea. anv gwregel.  
kel.12. gw. A.B. R255. g. pastenague.  
Flemm ar rae-du : g. le dard de la pastenague.
- rae-walenn (l. raeed-gwalenn) Raja clavata. anv gwregel.  
kel.5, 10, 11. gw. A.B. R248. g. raie bouclée.
- flê (l. flêed) Raja batis. anv gourel. kel.5, 6, 10, 11, 12.  
gw. A.B. R254. g. pocheteau gris.  
ur genou flê : ur beulke, ur genaoueg. kel.12.  
genou flê ! (kunujenn).
- dluzh (un. dluzhenn) anv-stroll. kel.1, 2. distaget : luz.  
gw. R.H. dluzh; S.S. dluz. g. truites.
- dluzh-somon(ed) Salmo trutta. kel.5. dist. luz-somon.  
g. truite de mer.
- somon (l. somoned) Salmo salar. anv gourel. kel.5, 6, 12.  
gw. R.H. eog; keureug; S.S. eog. g. saumon.
- { silienn (l. silioù) Anguilla anguilla. anv gwregel. kel.1,  
2, 3, 4, h.a. gw. A.B. R282.
- { silienn-dour-dous anv gwregel. kel.1, 2, 3, h.a. g. anguille.

- silienn (l. siliou) Conger conger. anv gwregel. kel.1, 2, 3, 4, 5, 6, 10, 11, 12, 13. gw. A.B. R285. g. congre.
- silienn-wenn (l. siliou-gwenn) g. gros congre blanc. kel. 12.
- silienn-du (l. siliou-du) g. congre de roche, noir. kel. 12.
- silienn-grenarez. krenarez : silienn ken lart ken e kren. kel.12.
- fouet (l. fouetou) : anv gourel. kel.3, 4, 5, 6, 10, 11, 12. gw. A.B. R.289. Silienn vihan re dreut da vezañ debret. Ober a reer ganti evit boueta ar c'hevell hag an andellou.
- arink (l. arinked) Clupea harengus. anv gourel. kel.3, 4, 5, 6, 10, 11, 12. gw. A.B. R263. g. hareng.
- sardinenn (l. sardined) Arenagus minor. anv gwregel. kel.3, 4, 10, 12. gw. A.B. R265. g. sardine.
- ( kerregenn (l. kerregened, kerreged) Belone belone. anv gwregel. kel.3, 4, 5, 6, 10, 11, 12.
- ( aguilhetezenn (l. aguilhetezed) anv gwregel. kel.18 (Douarnenez). gw. A.B. R292. g. orphie, aiguillette.
- aer-vor (l. aered-mor) anv gwregel. kel.12. gw. A.B. R296. g. syngnathe.
- marc'h-mor (l. kezeg-mor) anv gourel. kel.18 (Douarnenez). gw. A.B. R297. g. hippocampe.
- moru (l. morued) Gradus morrhua. anv gourel. kel.3, 4, 5, 6, 10, 11, 12, 13. gw. A.B. R304. g. morue, cabillaud.
- moullerg (l. moullaged) Trisopterus luscus. anv gourel. kel.3, 4, 5, 6, 10, 11, 12, 13. gw. A.B. R306. g. tacaud.
- marlank (l. marlanked) Merlangius merlangus. anv gourel. kel.10, 11, 12. gw. A.B. R308. g. merlan.
- Ur marlank gwenn : ur marlank bihan. kel.12.

- ( levneg (l. levneged) Pollachius pollachius. anv gourel. kel.3, 4, 5, 6, 10, 11, 12, 18. gw. A.B. R310, R311.
- ( levnegeta : pesketa levneged. kel.3, 4, 5, 6, 10, 11, 12.
- ( malawen (l. malawened) anv gourel. kel.18 (Douarnenez). gw. A.B. R309, 310, 311. g. lieu jaune.
- Evezhiadenn : kel.3, 4, 5, 6, h.a. levneg = pollachius pollachius" krenn ha bras.
- kel.18 (Douarnenez) : malawen = "pollachius pollachius" bihan ha krenn. levneg = "pollachius pollachius" bras.
- kel.3, 4, 5, 6, 10, 11, 12 : Ruzig (l. ruziged) anv gourel. gw. A.B. R309. distaget : ruig (l. ruied).
- ruzig = "pollachius pollachius" bihan ha ruz.
- gwalenneg (l. gwalenneged) Pollachius virens. anv gourel. kel.12. gw. A.B. R312. g. colin, lieu noir.
- Evezhiadenn : Pa daper un toullad gwalenneged e c'heller lavaret e vo mat ar vareaj. kel.12.
- morleanenn (l. morleaned) anv gwregel. kel.5, 10, 11, 12. gw. A.B. R318. g. motelle, loche de mer.
- juluan (l. juluaned) Molva molva. anv gourel. kel.5, 6. gw. A.B. R315. g. lingue commune, julienne.
- var-vor (l. ver-mor) Zeus faber. anv gwregel. kel.5, 6, 10, 11, 12. gw. A.B. R321. g. saint-pierre, dorée.
- kezeg-vor (l. kezekened-mor) Trachurus trachurus. anv gwregel. kel.3, 4, 5, 6, 10, 11, 12. gw. A.B. R329. g. chinchard, saurel commun.
- ( draeneg (l. draenigi) Roccus labrax. anv gourel. kel.3, 4, 5, 6, 10, 11, 12. dist. dreiniég (dreinigi).
- ( kwreien anv gourel. kel.18 (Douarnenez). gw. A.B. R324. g. bar, loup.
- penndroc'h (l. penndroc'hed) Pagellus centrodontus. anv gourel. kel.3, 4, 5, 6, 10, 11, 12. gw. A.B. R336. g. dorade commune, carpe de mer.

{ pirono (l. pironed) anv gourel. kel.3, 4, 5, 6, 10,  
11, 12.

{ piron (l. pironed) anv gourel. kel.18 (Douarnenez).  
gw. A.B. R335. g. dorade juvénile, petite dorade.

goular anv gourel. kel.18 (Douarnenez). g. grande  
dorade.

pennigib (l. pennigibed) Spondylisoma cantharus. anv gourel.  
kel.12. gw. A.B. R332. g. dorade grise, canthare,  
griset.

gwrac'h (l. gwrac'hed) Labrus berggylta. anv gwregel.  
kel.3, 4, 5, 6, 10, 11, 12. gw. A.B. R341. g. vieille.

gwrac'heta : pesketa gwrac'hed. kel.3, 4, 12.

gwrac'h vihan kel.12, 3, 4, 5, 6, 10, 11. g. vieille  
juvénile.

gwrac'h kozh kel.12. g. vieille de grande taille.

kalc'heg (l. kalc'heien) Pagellus erythrinus. anv gourel.  
kel.12. gw. A.B. R339. g. pageau commun (diasur).

soner (l. sonerien) Labrus ossifagus. anv gourel. kel.5,  
6, 10, 11, 12. gw. A.B. R345-346. g. labre varié.

{ tourc'hig (l. tourc'higed) Crenilabrus melops. anv gourel.  
kel.11, 12.

{ tarkin (l. tarkined) anv gourel. kel.10, 11, 12.

{ tarkinenn (l. tarkined) anv gwregel. kel.5, 6, 10, 11.  
gw. A.B. R348. g. crénilabre commun.

talareg (l. talareged) Hyperoplus lanceolatus. anv gourel.  
kel.3, 4, 5, 6, 10, 11, 12. gw. A.B. R355. g. lançon.

talaregeta : pesketa talareged. kel.3, 4, 12.

sprod anv-stroll. talareged nevez-c'hanet. kel.12.

pesk-mare-mor anv gourel. kel.18 (Douarnenez). gw. A.B.  
R350. g. vive.

beleg (l. belleien) Atherina presbyter. anv gourel. kel.3,  
4, 5, 6, 10, 11, 12. gw. A.B. R302. g. prêtre.

meilh (l. meilhi) anv gourel. kel.3, 4, 5, 6, 10, 11, 12,  
18. liester : kel.3, 4, 5, 6, 10, 11, 12 : meilhdi.  
gw. A.B. R299. g. mulet.

meilh-ruz (l. meilhi-ruz) anv gourel. kel.3, 4, 5, 6, 10,  
11, 12, 18. gw. A.B. R331. g. rouget.

brezhe (l. brizhili) Scomber scombrus. anv gourel. kel.3,  
4, 5, 6, 10, 11, 12, 18. distaget : kel.3, 4, 5, 6, 10,  
11, 12 : brezel (brizili); kel.18 (Douarnenez) : briel  
(brilli). gw. A.B. R357. g. maquereau.

ton (l. toned) anv gourel. kel.3, 4, 5, 6, 10, 11, 12.  
gw. A.B. R360-361. g. thon.

touilh-kroger. Bleennius pholis. anv gourel. kel.3, 4, 5, 6.  
gw. A.B. R352. g. mordocet.

touilh-penn-plat. Acanthocottus bubalis. anv gourel. kel.10,  
11, 12. gw. A.B. R373. g. chabot.

touilh-penn-kazh anv gourel. kel.12. kof gwenn; lost hir;  
daou c'horn bihan.

touseg-mor (l. touseged-mor) Acanthocottus scorpius. anv  
gourel. kel.10, 11. dist. toñseg-mor. g. scorpion de  
mer, rascasse (diasur).

kourn (l. kourned) anv gourel. kel.18 (Douarnenez). gw. A.B.  
R369. R.H. kourn. g. grondin.

kourn-glas (l. kourned-glas) Butrigla gurnardus. anv gourel.  
kel.18 (Douarnenez). gw. A.B. R369. g. grondin gris.

kourn-ruz (l. kourned-ruz) anv gourel. kel.18 (Douarnenez).  
gw. A.B. R372. g. grondin rouge.

{ meilh-maen (l. meilhi-maen) Cyclopterus lumpus. anv gourel.  
kel.12. dist. meilh-min.

{ meilh-karreg (l. meilhi-karreg) anv gourel. kel.18 (Douar-  
nenez). gw. A.B. R376. g. lompe, cycloptère, lièvre de  
mer.

toulboud (un. toulboudenn) Psetta maxima. anv-stroll.

kel.12. gw. A.B. R377; F.L. toulboud. g. turbots.

rouzenn-garreg (l. rouzenned-karreg) Zeugopterus punctatus.

anv gwregel. kel.12. gw. A.B. R379. g. targeur,  
sole de roche.

{ rouzenn (l. rouzenned) anv gwregel. kel.12.

{ solenn (l. solemed) anv gwregel. kel.3, 4, 10. dist. zolenn.

{ tarzenn (l. tarzenned) anv gwregel. kel.18 (Douarnenez).

gw. A.B. R386. g. sole.

{ plais (unanderenn : plaisenn) Pleuronectes platessa. anv-stroll. kel.3, 4, 10, 11, 14, 15.

{ plaisenn (l. plaised) anv gwregel. kel.12.

{ soualenn (l. soualed) anv gwregel. kel.18 (Douarnenez).

gw. A.B. R383. g. plie(s).

plaiseta : pesketa plaised. kel.12, 14, 15.

kel.Pêr Bourdelles : Perak emañ genou ar blaisenn a-dreuz ?

- "Ur blaisenn a oa chomet war an traezh. Ar Werc'hez a dremenas dre eno; hag (kement ha lavarout un dra bennak) e lavaras :

"Plaisennig, leno 'ra !"

"Ma !" eme ar blaisenn en ur weañ he genou. Hag abaoe eo chomet gweet.

{ molodenn (l. moloded) Mola mola. anv gwregel. kel.12.

{ molod (l. moloded) anv gwregel. kel.5, 10, 11. gw. A.B.

R281. g. poisson-lune.

{ boultouz (l. boultouzed) Lophius piscatorius. anv gourel. kel.18 (Douarnenez).

{ kerreno (l. kerrened) anv gourel. kel.10.

{ genacueg (l. genacueien) anv gourel. lesanv. kel.10, 11. dist. genoeg.

{ lonker-boueioù (l. lonkerien-boueioù) anv gourel. lesanv. kel.3, 4, 5, 6, 10, 11, 12. dist. lonker-boeyo.

Evezhiadenn : Anvet evel-hen dre ma vez tapet alies goude bezañ klasket lonkañ unan eus boueioù ur roued. gw. A.B. R388. g. baudroie, lotte.

chevr (un. chevrenn) l. chevred. anv-stroll. kel.3, 4, 5, 6, 10, 11, 12, 17. gw. A.B. R152. g. crevettes.

chevreta (kel.3), chevra (kel.12) : pesketa chevred.

{ chevr-bras. Leander adpersus. anv-stroll. kel.5, 6.

{ chevr-ruz (pa vezont poazh). anv-stroll. kel.3, 4. gw. A.B. R152. g. crevettes roses, bouquet.

{ chevr-traezh. Cranon vulgaris. anv-stroll. kel.10, 12, 11.

{ chevr-gris. anv-stroll. kel.3, 4, 5, 6. gw. A.B. R157. g. crevettes grises.

{ silar (l. silared) Scyllarus arctus. anv gourel. kel.12.

{ kuler (l. kulerien) anv gourel. kel.5, 6, 8, 9, 12.

gw. A.B. R173. g. cigale de mer.

{ gavr-mor (l. givri-mor) Palinurus vulgaris. anv gwregel.

kel.1, 2, 3, 4, 5, 6, 10, 11, 12. dist. gerv-vor.

liester : kel.12 : givri-mor; kel.3, 4 : girvi-mor.

{ grilh (l. grilhed) anv gourel. kel.18 (Douarnenez). gw. A.B.

R.164. g. langouste.

legrestr (l. legristi) Homarus vulgaris. anv gourel. kel.1, 2, 3, 4, 5, 6, 10, 11, 12, 18. gw. A.B. R159.

g. homard.

henezh 'zo ul legrestr ! g. celui-là c'est un numéro !

(hag ivez : henezh 'zo : ul lapin, ur c'hwil, un ebeul, un dañvad, ur c'hwezhet, ur gway, ur gwayer). kel.1.

krank (l. kranked) anv gourel. kel.1, 2, 3, 4, h.a.

g. crabe.

kranketa : klask kranked. kel.12.

krank-glas (l. kranked-glas) Carcinus maenas. anv gourel.

kel.3, 4, 5, 6, 8, 9, 10, 11, 12. gw. A.B. R188.

g. crabe vert, crabe enragé.

krank-ruz (l. kranked-ruz) "carcinus maenas" ruz.

krank-saoz (l. kranked-saoz) Cancer pagurus. anv gourel.  
kel.3, 4, 5, 6, 8, 9, 10, 11, 12, 18. gw. A.B. R181.  
g. tourteau, crabe dormeur, dormeur.

krank-trebez (l. kranked-trebez) Macropipus puber. anv  
gourel. kel.5, 6, 8, 9, 10, 11.

krank-mordañvad (l. kranked-mordañvad) anv gourel. kel.9,  
13. gw. A.B. R189. g. étrille.

morgevid (un. morgevidenn) Maja squinado. anv-stroll.  
kel.3, 4, 5, 6, 8, 9, 10, 11, 12, 14, 15. distaget :  
morginid.

kevid (un. kevidenn) anv-stroll. kel.18 (Douarnenez).  
dist. kiounid. gw. A.B. R196. g. araignées de mer.

morgad (un. morgadenn) Sepia officinalis. anv-stroll.  
kel.18 (Douarnenez).

sachenn (l. sachenned) anv gwregel. kel.10, 11, 12. kel.  
10, 11 : jasenn; kel.12 : zachenn. gw. A.B. R125.  
g. seiche(s).

pivid (l. pividoù) anv gourel. kel.10, 14, 15. dist.  
kel.10 : bivi; kel.14, 15 : bibi. gw. A.B. R126.  
g. os de seiche.

kornielenn (l. kornieled) Loligo forbesi. anv gwregel.  
kel.5, 6, 10, 11, 12.

kornielata : klask kornieled. kel.12.

stiozenn-vras (l. stiozenned-bras) anv gwregel. kel.18  
(Douarnenez). gw. A.B. R131. g. calmar, calamar,  
encornet.

souaenn (l. souaed) Eledone cirrosa. anv gwregel. kel.3,  
4, 5, 6, 10, 11, 12, 14, 15.

noch-an-toer anv gourel. kel.18 (Douarnenez). gw. A.B.  
R134. g. poulpe, pieuvre.

souaeta : klask souaed. kel.3, 4, 12.

bloneg-mor (un. blonegenn-vor) anv-stroll. kel.3, 4, 5,  
6, 8, 9, 10, 11, 12. dist. blañ-neg-mor.

planedenn-vor (l. planedennou-mor) anv gwregel. kel.12.  
gw. A.B. R13. g. méduse.

pegereg (l. pegerezed) anv gwregel. kel.8, 9, 10. gw. A.B.  
R18. g. anémone de mer.

keureg (l. keureged) anv gourel. kel.3, 4, 5, 6, 8, 9.

keur (l. keured) anv gourel. kel.10, 11, 12, 14.

u-keur (l. uou-keur) anv gourel. kel.15. gw. A.B. R211.  
g. oursin.

garili (un. garilienn) Lepas anatifera. anv-stroll. kel.10.  
gw. A.B. R142. g. anatifes.

perlez-mor (un. perlezenn-vor) anv-stroll. kel.10.

perseverañs anv-stroll. kel.12. gw. A.B. R143. g. balanes.

raden-mor (un. radenenn-vor) Eunicella verrucosa. anv-stroll.  
kel.10, 12. gw. A.B. R16. g. gorgones.

stered-mor (un. steredenn-vor) anv-stroll. kel.3, 4, 5, 6,  
10, 11, 12. gw. A.B. R204. g. étoiles de mer.

c'hwen-mor (un. c'hwenenn-vor) Talitrus saltator. anv-stroll.  
kel.3, 4, 5, 6, 8, 9, 10, 11, 12. gw. A.B. R150.  
g. puces de mer.

laou-mor (un. laouenn-vor) anv-stroll. kel.3, 4, 10.  
gw. A.B. R146, 145, 147, 148. g. cloportes de mer.

briyêouz. Nereis diversicolor. anv-stroll. kel.3, 4, 5,  
6, 8, 9, 10, 11, 12. gw. A.B. R27. g. gravette rouge.

teodeg (l. teodeien) anv gourel. kel.3, 4, 10, 11, 12.  
gw. A.B. R30. g. gravette blanche.

teodegeta : klask teodeien. kel.12.

kalc'hud (un. kalc'hudenn) Arenicola marina. anv-stroll.  
kel.11, 12.

kalc'huta : klask kalc'hud. kel.12.

leog (un. leogenn; l. leoged) anv-stroll. kel.3, 4, 5, 6,  
10, 11. dist. leogo. gw. A.B. R34. g. arénicole des  
pêcheurs.

petiz (un. petizenn) Marphysa sanguinea. anv-stroll. kel.3, 4, 5, 6, 10, 11, 12. distaget : pistiz(enn). gw. A.B. R32. g. marphyse.

petisa : klask petiz. kel.12. dist. pistisa.

krogen (l. kregen) anv gwregel. kel.1, 2, 3, 4, h.a. gw. A.B. R139. g. coquille, coquillage.

krogen-sant-Jakez (l. kregen-sant-Jakez) Pecten maximus. anv gwregel. kel.10. gw. A.B. R119. g. coquille saint Jacques, grand peigne.

brinnig (un. brinnigenn) anv-stroll. kel.3, 4, 5, 6, 8, 9, 10, 11, 12, 13, 14, 15, 18. dist. kel.3, 4, h.a. : brinnig; kel.18 (Douarnenez) : biridig. gw. A.B. R54. g. patelles, berniques, bassins, flies, jambes, lapas, rans.

brinnika : klask brinnig. kel.12.

brinnikaer : klasker brinnig;

" " : benveg (sizailh koad kalet) evit distagafi ar brinnig eus ar reier.

kel. Pêr Bourdelles : "Ar c'hazh a rofe e lagad evit kacout ur vrinnigenn !"

Evezhiadenn : Gwechall e veze roet brinnig poazh d'ar c'hizier ha d'ar moc'h.

ormel (un. ormelenn) Haliotis tuberculata. anv-stroll. kel. 1, 2, 3, 4, 5, 6, 8, 9, 10, 11, 12; gw. A.B. R44. g. ormeau, haliotide commune, ormet, ormier, silieux, oreille de mer, oreille de Neptune, oreille de Saint Pierre.

ormela : klask ormel. kel.1, 2, 12.

kantik (l. kantikou) Trivia europea. anv gourel. kel.12. gw. A.B. R68. g. porcelaine-puce, grain de café, pou de mer, pucelage, petit cochon.

bigornenn (l. bigorned) anv gwregel. kel.1, 2, 3, 4, h.a. gw. A.B. R45. g. bigorneau.

bigorneta : klask bigorned. kel.12.

bigornenn-gaoc'h-ki (l. bigorned-kaoc'h-ki) Trochocochlea crassa. anv gwregel. kel.1, 2, 3, 4, 5, 6, 7, 8, 9, 10, 11, 12. gw. A.B. R47. g. troque épais, bigorneau gris.

bigornenn-velen (l. bigorned-melen) Littorina obtusata. anv gwregel. kel.1, 2, 3, 4, h.a. gw. A.B. R64. g. littorine obtuse, bigorneau jaune.

bigornenn-du (l. bigorned-du) Littorina littorea. anv gwregel. kel.1, 2, 3, 4, h.a. gw. A.B. R65. g. littorine littorale, bigorneau noir.

bigornenn sec'h : bigornenn c'houllo. kel.3.

kog-mor (l. kigi-mor) Buccinum undatum. anv gourel. kel.1, 2, 3, 4, 5, 6, 10, 11, 12. gw. A.B. R74. g. buccin, bulot.

( bigornenn-draezh (l. bigorned-traezh) Nassa reticulata.  
{ anv gwregel. kel.12.

( bigornenn-wenn (l. bigorned-gwenn) anv gwregel. kel.3, 4.  
{ gw. A.B. R73. g. masse réticulée.

( rigadell (un. rigadelle) Cardium edule. anv-stroll.  
{ kel.12.

( rigadell (l. rigadelled, rigadelloù) anv gwregel. kel.5, 6,  
{ 10. kel.5, 6, 10 : dist. : riganell. kel.12 : rigadell.

( rigadell-ront (l. rigadelled-ront) anv gwregel. kel.18  
{ (Douarnenez). distaget : rugadell ront. gw. A.B. R86.  
{ g. coque.

( kokouz (un. kokouzenn) Tapes decussatus. anv-stroll. kel.1,  
{ 2, 3, 4, 5, h.a. gw. A.B. R92.

( rigadell-plat (l. rigadelled-plat) anv gwregel. kel.18  
{ (Douarnenez). dist. rugadell-plat. g. palourde(s),  
{ clovisse(s), tapes croisée(s).  
{ kokousa : klask kokouz. kel.1, 2, 3, 4, 10, 12.

kokouz-flour (un. kokouzenn-flour) Tapes rhomboideus.  
anv-stroll. kel.3, 4, 5, 6, 8, 9, 10. gw. A.B. R94.  
g. tapes losangiques. E galleg-saout Poulmanac'h :  
"floures".

kokouz-ruz (l. kokouzenn-ruz) Cytherea chione. anv-stroll.  
kel.12. gw. A.B. R91. g. vernis, cythérées fauves.

kouilhenn-varc'h (l. kouilhoù-kezeg) Lutraria lutraria.  
anv gwregel. kel.12. gw. A.B. R103. g. lutraire.

toufoù-kalkon. Mya arenaria. liester. kel.12. gw. A.B.  
R104. g. myes des sables, becs de jars, clangues.

kontelleseñn (l. kontelleged) anv gwregel. kel.1, 2, 3, 4,  
5, 6, 8, 9, 10, 11, 12. gw. A.B. R106. g. couteau.

istr (un. istrenn) anv-stroll. kel.3, 4, 12. dist. ist,  
istenn. gw. A.B. R122. g. huitres.

meskl (un. mesklenn) anv-stroll. kel.3, 4, 5, 6, 10, 12.  
distaget : kel.3, 4 : mesk(enn); kel.12 : mlesk(enn);  
gw. A.B. R113. g. moules.

meskla : klask meskl. kel.12. dist. mleska.

Krennlavar : Pa vez ar bleuñv er balah  
e vez leun a voued ar meskl. (kel.10).

gwez (un. gwezenn) anv-stroll. kel.1, 2, 3, 4, h.a.  
dist. gwe, gweñ; un. gweenn. g. arbres.

brank (l. brankoù) : anv gourel. kel.1, 2, 3, h.a.  
gw. R.H. brank, skourr, barr, skoultr; S.S. brank, skourr;  
divarrañ ur wezenn : troc'hañ barroù, brankoù ur wezenn,  
kel.1;

Korf ar wezenn : kef ar wezenn. kel.1;

ur wezenn gleuz. kel.1. g. un arbre creux.  
{ peilhaes-gwez kel.10.  
{ ruskenn kel.1  
{ plusk-gwez kel.1 gw. R.H. plusk, rusk(enn);  
J.G., S.S. ruskenn. g. écorce.

kignat ur wezenn : dibluskañ, diruskañ ur wezenn. kel.1.

skoulm(ù) ur wezenn. kel.1, 2, 10. gw. R.H. skod, ulmenn.  
g. noeud d'un arbre.

fourchell(ù) ur wezenn. anv gwregel. gw. R.H. gaol,  
fourch, kavaz; J.G., S.S. gaol. g. fourche d'un arbre.

briñsenn (l. briñsoù) kel.1, 2. dist. briñchoù. gw. R.H.  
briñsenn (briñsed), picholenn (picholoù).

gwrizienn (l. gwrizioù) kel.1, 2. dist. Gwrienn (gwrioù).

delienn (l. delioù) kel.1, 2.

{ tagos (anv gourel) (l. tagosoù)  
{ torgos (l. torgosoù) anv gourel. Gw. R.H. penndogenn,  
tagosenn, penndolog; S.S. talgos, penngos, penndolog;  
J.G. tagos, torgos. g. têtard.

bout (l. boutoù) anv gourel. kel.1, 2. gw. R.H. broñs,  
broust, bouilhas; S.S. broñs, bouilhas. g. bourgeon.

bevenn (ar vevonn) anv gwregel. kel.1, 2. dist. bewenn.  
gw. R.H. sabr, sev, jol, seim, teñv, mel; S.S. seo;  
J.G. gwad; g. sève.

- { pin anv-stroll. kel.1, 2, 10.  
 { gwez-pin (un. gwezenn-bin) anv-stroll. kel.1, 2, 10.  
 gw. R.H. pin(enn); S.S. pin(enn); g. pins.  
aval-pin (l. avaloù-pin) anv gourel. kel.1, 2, 10.  
 g. pomme de pin.  
rousin anv-stroll. kel.1, 2, 10. g. résine.
- { derv (un. dervenn) anv-stroll. kel.1, 2, 10. dist. dero,  
 derw (derwenn).  
 { gwez-derv (un. gwezenn-derv) anv-stroll. kel.1, 2, 10.  
 gw. R.H. derv, tann; S.S. dero. g. chênes.  
mez (un. mezenn) anv-stroll. kel.1, 2. g. glands.  
aval-derv (l. avaloù-derv) anv gourel. kel.1, 2.  
 gw. R.H. aval-derv, aval-tann. g. noix de galle.
- { kistin anv-stroll. Castanea savita.  
 { gwez-kistin (un. gwezenn-gistin) anv-stroll. kel.1, 2, 10.  
 gw. R.H. kistin(enn) g. châtaigniers.  
kistin (un. kistinenn) g. châtaignes. kel.1, 2.  
kistina : klask kistin. kel.1, 2.  
 { tog-kistin (l. togoù-kistin) kel.10, 17.  
 { peilhaes-kistin kel.16.  
kistin-moc'h (un. kistinenn-voc'h) kel.1, 2, 10, 14, 15.  
 gw. J.G. kistin-moh; R.H. kistin-moc'h, kistin-Indez,  
 brizh kistin. g. marrons d'Inde.
- { faou(enn). Fagus Silvatica.  
 { gwez-faou (un. gwezenn-faou) anvioù-stroll. kel.1, 2.  
 dist. fow, vow; gw. R.H. faou(enn); S.S. fao.  
 g. hêtres.
- faou-put. Carpinus betulus. anv-stroll. kel.1, 2. gw. R.  
 H. faou-put (faouenn-but). g. charmes.
- gwez-kraoñ (un. gwezenn-graoñ) Juglans regia. anv-stroll.  
 kel.1, 2, 14, 15. dist. gwe-kraw. gw. R.H. kraoñenn;  
 S.S. gwez-kraoñ. g. noyers.  
kraoñ (un. kraoñenn) kel.1, 2, 14, 15. gw. R.H., S.S.  
 kraoñ. dist. kraou(-enn). g. noix.  
kraoña : klask (pe dastum) kraoñ. dist. kraoua. kel.1, 2.

- gwez-kelvez (un. gwezenn-gelvez) Corylus avellana. anv-stroll.  
 kel.1, 2. dist. gwe-kelwe (gweenn-gelwe). gw. R.H.,  
 S.S. kelvez. g. noisetiers.  
kraoñ-kelvez (un. kraoñkelvesenn) kel.1, 2. dist.:  
 kraoukelwe(enn). (g. noisettes.  
kraoñkelvesa : klask kraoñkelvez. dist. kraoukelwea.  
 kel.1, 2.
- { tilh(enn)  
 { gwez-tilh (un. gwezenn-dilh) anvioù-stroll. kel.1, 2.  
 g. tilleuls; ormes.
- { gwern(enn)  
 { gwez-gwern (un. gwezenn-wern) anvioù-stroll. gw. R.H., S.S.,  
 J.G. gwern. g. aulnes.  
Evezhiadenn : ar c'hoad-gwern 'zo mat d'ober botoù-koad.
- { onn(enn)  
 { gwez-onn (un. gwezenn-onn) anvioù-stroll. kel.1, 2. gw. R.H.  
 onn; oulm-gwenn; S.S. onn. g. frênes.  
 E derou ar c'hantved-mañ, e Ploubêr (Treger).  
 Ar vestrez o wellet ur bugel o tont diwezhat d'ar skol :  
 -"Où étais-tu donc resté ?" emezi.  
 Ar bugel :  
 -"J'étais resté regarder la gazez-koad piquer l'arbre de  
 onn..." (kel. Max Prat).
- { bezv(enn)  
 { gwez-bezv (un. gwezenn-vezv) anvioù-stroll. kel.1, 2, 10.  
 dist. bôw, gwe-bôw. gw. R.H. bezv; S.S. bezo.  
 g. bouleaux.
- { haleg(enn)  
 { gwez-haleg (un. gwezenn-haleg) anvioù-stroll. kel.1, 2, 10.  
 gw. R.H., S.S. haleg. g. saules.  
bisig-haleg (l. bisigoù-haleg) : bleuñvenn haleg.  
 gw. R.H. bisig(où); boullou-moutig; kazh-haleg.  
Krennlavar : Pa vez erru ar bleuñv en haleg  
 e vez tremenet ar goañv kalet. kel.2.

- ( aozilh(enn)  
 { gwez-aozilh (un. gwezenn-aozilh) anvioù-stroll. kel.1, 2.  
 gw. R.H., S.S. aozilh. g. osiers (saules)
- ( pupli(enn)  
 { gwez-pupli (un. gwezenn-pupli) anvioù-stroll. gw. R.H.  
 efl, pupli; S.S. elo, pupli. dist. peupli. g. peupliers.  
koad-pupli kel.1. dist. kwat-peupli. g. bois de peuplier.
- gwez-avaloù (un. gwezenn-avaloù) anv-stroll. kel.1, 2, 14, 15. gw. R.H. avalenn; S.S. svalenn; gwez-avalou; J.G. eur wezenn-aval. g. pommiers.  
aval (l. avaloù) anv gourel. g. pomme.  
 { aval-korn (l. avaloù-korn) kel.13, 14, 15, 1, 2, 10.  
 { aval-spern (l. avaloù-spern) kel.1, 2, 10.  
 aval bihan, glas, kalet, ha trenk-put. g. pomme sauvage.
- gwez-per (un. gwezenn-ber) anv-stroll. kel.1, 2, 10, 14, 15. gw. R.H. perenn. g. poiniers.  
per (un. perenn) : anv-stroll. kel.1, 2, 10, 14, 15.  
 g. poires.  
koper (un. koperenn) : anv-stroll. kel.1, 2, 3, 4, h.a.  
 gw. R.H. kosper, kalper. g. poires sauvages.
- gwez-kerez (un. gwezenn-gerez) anv-stroll. kel.1, 2, 14, 15. gw. R.H. kerezenn. g. cerisiers.  
kerez (un. kerezenn) kel.1, 2, 10, 14, 15. anv-stroll.  
 g. cerises.
- gwez-mesper (un. gwezenn-vesper) Mespilus germanica.  
 anv-stroll. kel.1, 2, 10, 14, 15. gw. R.H. mesperenn.  
 g. néfliers.  
mesper (un. mesperenn) : anv-stroll. kel.1, 2, 10, 14, 15. g. nèfles.
- ( sivienn (l. sivienned) anv gwregel. kel.16.  
 { gwez-sivi (un. gwezenn-sivi) anv-stroll. kel.1, 2, 10, 14, 15.

- gw. R.H. sivienn. g. fraisier(s).  
sivi (un. sivienn) anv-stroll. kel.1, 2, 10, 14, 15.  
 g. fraises.
- dreiz (un. drezenn) anv-stroll. kel.1, 2, 3, 4, h.a. dist.:  
 dreiz. gw. R.H., J.G., S.S. dreiz. g. ronces.  
mouar (un. mouarenn) anv-stroll. kel.1, 2, 3, 4, h.a.  
 dist. mou-ar. g. mûres.  
mouara : klask, pe dastum mouar.  
mouar-jardin : kel.10. g. framboises.
- skav (un. skavenn) anv-stroll. kel.1, 2, 10. gw. R.H. skav;  
 S.S. skao. g. sureau.
- linad (un. linadenn) anv-stroll. kel.1, 2, 3, h.a. gw.  
 R.H., S.S. linad. g. ortie.  
Evezhiadenn : Poazhet ha roet d'ar moc'h pa vez "just ar boued". kel.1. Pêr Bourdelles.
- balan (un. balanenn) anv-stroll. kel.1, 2, 3, 4, h.a.  
 dist. bâlen. gw. R.H. banal, balan; S.S. balan; J.G.  
 balan. g. genêt.  
bleuñv-balan anv-stroll. kel.1, 2, h.a. g. fleurs de genêts.  
 { klor-balan (un. klorenn-valan) anv-stroll. kel.1, 2.  
 { distaget : kleur-balan.  
 { kogoù-balan (un. kogenn-valan) liester. kel.10.  
 g. gousses de genêt.  
piz-balan (un. pizenn-valan) kel.1, 2. frouezh ar balan.
- lann anv-stroll. kel.1, 2, 3, h.a. gw. R.H., S.S., J.G.  
 lann. g. ajonc.
- lann-brezhonek anv-stroll. kel.10. gw. R.H. lann-pil;  
 J.G. lann brezoneg. g. ajonc nain.
- brug (un. brugenn) anv-stroll. kel.1, 2, 3, 4, h.a.  
 gw. R.H., S.S. brug. g. bruyère.
- kanab (un. kanabenn) Cannabis sativa. anv-stroll. kel.1,  
 2, 10, 14? 15. gw. R.H. kanab, kouarc'h. g. chanvre.

sklos (un. sklosenn) anv-stroll. kel.10 : korzennoù kanab.

askol (un. askolenn) anv-stroll. kel.1, 2, 5, 6, 10, 17.  
gw. R.H., S.S. askol. g. chardon.

gwezvoud (un. gwezvoudenn) anv-stroll. kel.5, 6, 10, 12, 13, 14, 15. dist. gwiboud. gw. R.H. gwezvoud, iliavrez, boued-gevr, troad-bleiz; S.S. gwezvoud; Jarl Priel (Amañ hag ahont) : laezh-koukou. F.L. beüt (un. beütenn).  
g. chèvrefeuille.

Evezhiadenn : Gwechall e veze graet gant gwial gwezvoud diruskennet, soubet en dour tomm, evit kordat panerol.  
kel.1, 2, 5, 6, 10.

beuz (un. beuzenn) anv-stroll. kel.1, 2, 10, 14, 15.  
gw. R.H., S.S. beuz. g. buis.

poulc'hod (un. poulc'hodenn) anv-stroll. kel.1, 2, 9, 10, 17. gw. R.H. broenn; S.S. broenn. g. jonc.

palud (un. paludenn) anv-stroll. kel.10. gw. S.S., R.H. raoskl, korz. g. roseaux.

Evezhiadennoù : douar-palud : douar du ar paludoù. kel.1.  
kellenn (l. kellennoù) anv gourel. kel.10. Poull-dour, raoskl ha bodoù geot ennañ.

palud : anv-stroll. Fank du lezet gant ar mor, war-lerc'h al lanv. kel.1.

korz-dour (un. korzenn-dour) anv-stroll. kel.1, 2, 10.

gw. R.H., S.S. korz; J.G. korz-dour. g. ombellifères à tige creuse, aquatiques.

korz-babouz (un. korzenn-yabouz) Heracleum sphondylium.

anv-stroll. kel.1, 2. gw. J.G. korz-babouz, korz-prad.  
g. berce.

{ pempiz anv-stroll. kel.17.

{ louzaouenn-ar-pempiz anv gwregel. kel.10, 17. gw. R.H.  
louzaouenn-ar-pemp-biz; kegid; pempiz. g. cigüe.

spern-gwenn (un. spernenn-gwenn) anv-stroll. kel.1, 2, 10, 14, 15. gw. R.H., S.S. spern-gwenn. g. aubépine blanche.  
spern (un. spernenn) g. épines.

spern-du (un. spernenn-du) Prunus spinosa. anv-stroll.  
kel.1, 2, 10, 14, 15. gw. R.H. spern-du. g. prunelliers, épine-noire.

irin (un. irienn) frouezh ar spern-du. g. prunelles.

gwez-spezad (un. gwezenn-spezad) Ribes uva-crispa. anv-stroll.  
kel.1, 2, 10, 14, 15. g. groseilliers à maquereaux.

spezad (un. spezadenn) anv-stroll. kel.1, 2, 10, 14, 15.  
dist. kel.10 : spezer (un. spezerenn ; kel.14, 15 : spezard(enn)). gw. R.H., S.S. spezad. g. groseilles à maquereaux.

gwez-kastilhez (un. gwezenn-gastilhez) Ribes rubrum. anv-stroll. kel.1, 2, 10, 14, 15. g. groseilliers à grappes.

kastilhez (un. kastilhezenn) anv-stroll. kel.1, 2, 10, 14, 15. distaget : kastilhez. gw. R.H. kastilhez.  
g. groseilles à grappes.

Frouezh (amañ : freuz(enn)) koudask :

gregon (un. gregonenn) : anv-stroll. kel.1, 2, 3, 4, 5, 6, 10, 14, 15. dist. gwregon. gw. R.H. gregon, polos.  
g. prunes sauvages.

irin-dant (un. irinenn-dant) : anv-stroll. kel.1, 2, 14, 15. distaget : kel.14, 15 : irin-dant; kel.1, 2 : ili-dant. gw. Jarl Priel (Amañ hag ahont) : ili-dant.  
g. cormes, sorbes, etc.

gwez-lus (un. gwezenn-lus) Vaccinium myrtillus. anv-stroll.  
g. myrtille.

lus (un. lusenn) : anv-stroll. kel.1, 2, 14, 15, 17.  
gw. R.H., S.S. lus. g. myrtilles.

lore (un. loreenn) anv-stroll. kel.1, 2, 10. gw. R.H., J.G., S.S. lore. g. laurier, fusain.

troell (un. troellenn) - an droell - anv-stroll. kel.1, 2, 10, 14, 15, 17. gw. R.H. gweerez, troell; S.S. troell, J.G. troëll. g. liseron.

iliav (un. iliavenn) Hedera helix. anv-stroll. kel.1, 2, 3, 4, h.a. distaget : kel.1, 2 : ilio; kel.3, 4, 5, 6, 8, 9, 10, 12, 13, 14, 15 : iliêo, iliêw. gw. R.H. iliav, brust, broust, fouliar, delioù-red, iliav-red; S.S. ilio. g. lierre.

boullou-du : frouezh an iliav. kel.10.

gargel (un. gargelenn) Ilex aquifolium. anv-stroll. kel.1, 2, 10, 13, 14, 15. dist.: kel.1, 2 : gargel; kel.13, 14, 15 : gargal. gw. R.H. gargel, kelenn; S.S. kelenn. g. houx.

spuzug (un. spuzugenn) Ruscus aculeatus. anv-stroll. kel.10, 12, 13. gw. R.H. beuz-bleiz, bug, bugelenn, garbig. g. fragon, petit houx, "buis de Satan".

Evezhiadennoù : Graet e veze gant ar spuzug, n'eus ket keit-se, sa skubañ an oaledoù hag ar bigi.

En ul lod eus Bro-Dreger hag e Kernev-Uhel e lavarer ivez, a gredan : BEUZ-AN-DIAOUL.

tog-touseg (l. togou-touseged) distaget : tog-toñseg. anv gourel. kel.1, 2, 9, 10, 16, 17. gw. R.H. kabell-touseg, skabell-douseg, tog-touseg; S.S. kabell-touseg; J.G. skabell-douseg. g. champignon.

louf-louarn anv-stroll. kel.10. tog-touseg stummet evel ur c'hwezhiagell. Pa vez sec'h e vez poultr melen ennañ; dañjerus eo.

raden (un. radenenn) anv-stroll. kel.1, 2, 3, 4, h.a. gw. R.H., J.G., S.S. raden. g. fougère.

krank-raden : anv gourel. kel.1, 2, 5, 6, 10. Gwrizienn gamm ar radenenn.

raden-gad (un. radenenn-c'haq) Drvopteris Filis-mas. anv-stroll. kel.1, 2, 8, 9, 10, 14, 15. gw. J.G. raden-

bleiz. g. fougère mâle.

Evezhiadenn : Implijet evel louzoù-prefved (kel.1, 2). Kreskiñ a ra el liorzhoù, er c'hoadeier, tost d'ar gwazhoù, el lec'hioù gleb. Raden bihan, bodennek, gant ur c'hleuz en o c'hreiz.

raden-dour (un. radenenn-dour) Asplenium scolopendrium (pe : Phyllitis scolopendrium) anv-stroll. kel.1, 2, 10. gw. R.H. teod-karv. g. scolopendre, langue de cerf.

( lostou-lern (un. lost-al-louarn) kel.1, 2, 17.  
( lostou-naered. kel.15. liesterioù. gw. R.H. lost-marc'h; lost lost-hoc'h; c'hwistou; S.S. lostou-lern. g. queues de cheval, prèles.

spoue (un. spoueenn) anv-stroll. kel.1, 2, 10. dist.: spouea. gw. R.H. spoue, kinvi, man, touskan; S.S. kinvi. g. mousse.

lichen anv-stroll. kel.1, 2. gw. R.H. glañch, gloaneg, glandour. g. mousse d'eau.

kaol-garv (un. kaolenn-c'harv) Dorago officinalis. anv-stroll. kel.10. dist. kôl-garo. gw. R.H. kaol-garv, bourrachez. g. bourrache.

Evezhiadenn : Mat eo ar c'haol-garv da ober dour-louzoù. Mat int ivez ouzh terzhienn ar ruzell. kel.10.

( tael (un. taelenn) Rumex hydrolapathum. anv-stroll. kel.1, 2, 13, 17. distaget : têt. gw. J.G.; R.H. kaol-moc'h, teal. g. patience, pabelle, rumex.

( Evezhiadenn : ar Waz-têt (ti e Serwel). kel.Pêr Bourdelles.

( louzaenn-ar-basianted anv gwregel. kel.10.

( Krennlavar : Louzaouenn ar basianted  
Mont alies d'he gwelet. kel.10

( turlod (un. turlodenn) Umbilicus rupestris. Anv-stroll. kel.8, 9.

( dule anv-stroll. kel.1, 2, 12, 13, 17.

( krampouezh-mouzhik (un. krampouezhenn-vouzhik) anv-stroll

kel.14, 15. gw. R.H. krampouezh-mouezig, dule; J.G. krampouez-mouzig. g. cotylet, ombilic, nombril de Vénus. Evezhiadennoù : Gwechall e veze lakaet turlod digroc'h-enet war ar goullioù. kel.1, 2, 8, 9, 12, 13, 14, 15. Ur ger diwar-benn "krampouezh-mouzhik" : mouzhik = mouspennek, kamm e c'henou, droug ennañ, o komz eus ur bugel, dreist-holl.

Tro-lavar : mont da doull-mouzhik = mont d'e doull da vouzhañ, da chaokat e c'henou : da sk. "aet eo da doull-mouzhik." kel.15.

stlañvesk anv-stroll. kel.1, 2, 10, 14, 15. dist. sklañves, sklañvesk. gw. R.H. stlañvesk, hedledan, dibennaotez, stlone. g. plantain.

piz-logod anv-stroll. kel.1, 2, 10, 17. gw. R.H. gweg, beñs, piz-logod; S.S., J.G. piz-logod. g. vesce, gesse.

( pegas Galium aparine anv-stroll. kel.1, 2, 10. gw. R.H. krogerez, seregenn, seregenn-vihan, teod-évn; J.G. peg, spég.

( louzaouenn-ar-paour anv gwregel. kel.1, 2, 17. g. gratteron, gaillet.

( milskoulm (Polygonum) anv-stroll. kel.8, 9, 10, 14, 15, 17. dist. milskourm.

( louzaouenn-ar-milskoulm anv gwregel. kel.10. dist. louzaouenn-ar-milskourm. gw. R.H. milskoulm, melloù, milglom; J.G. milskoulm. g. renouée.

kord Cynodon dactylon. anv-stroll. kel.8, 9, 10, 13, 14, 15. gw. R.H. treuzgeot, ternud, krizerez, geot-lasoù, louzaouenn-ar-c'hi, kagn. g. chiendent.

gwennig - ar wernig. Thlaspi arvense. anv-stroll. kel.17. gw. J.G. gwennig. g. monnoyère, thlaspi.

penngalet. Chenopodium album. anv-stroll. kel.1, 17. g. ansérine, patte d'oie, chénopode blanc.

( flutkerc'h. Avena sterilis (pe : Avena fatua) anv-stroll. kel.17.

( pluskerc'h. anv-stroll. kel.10. g. folle avoine.

geot (un. geotenn) anv-stroll. kel.1, 2, 3, 4, h.a. dist. yeot(enn). g. herbe.

geot-gwenn anv-stroll. kel.1, 2, 10. geot o kreskiñ tost d'an dour. Gwenn-holl eo pa'z eo sec'h. Ur metrad uhelder; lakaet da c'houzer e kraou al lapined.

geot-toupennek (un. geotenn-doupennek) Lagarus ovatus. anv-stroll. kel.17. g. chatons, queues de lièvres.

( huelenn-c'hwerev Artemisia absinthium. anv gwregel. kel.1,2. { louzaouenn-c'hwerv anv gwregel. kel.14, 15. gw. R.H. huelenn, huelenn-c'hwerv. g. absinthe.

Evezhiadennoù : Gant an huelenn-c'hwerv e c'heller ober dour-louzoù : "Me 'ya da dreiñ dour dit diwar an huelenn-c'hwerv." (ma zad-kozh : kel.1). Al Louzaouenn-mañ a zigor ar galon.

pilheneg anv-stroll. kel.14, 15. gw. R.H. louzaouenn-bilhennek, pilheneg, madre, aouredal; J.G. boued-evned. g. senegon.

Evezhiadenn : "debret gant an evned". kel.15.

triñchin (un. triñchinenn) anv-stroll. kel.1, 2, 3, h.a. gw. R.H. triñchin, trechon; S.S., J.G. triñchin. g. oseille.

ur boked triñchin g. un bouquet, un rameau d'oseille.

triñchin-gad anv-stroll. kel.1, 2, 10, 17. gw. R.H. triñchin-logod; J.G. triñchin-gad (= "oxalis"). g. oseille sauvage (Rumex).

fleur (un. fleurenn) anv-stroll. kel.1, 2, h.a. gw. R.H. bleuñv(enn); bleunienn (bleuniennoù, bleunioù); boked; fleur; S.S. bleuñv(enn); bleunienn (bleunioù); J.G. boked; fleur; bleuñ. g. fleurs.

gweñviñ kel.1, 2, 10. g. (se) fâner.

fleur-pod, fleur-podoù anv-stroll. kel.1, 2. gw. R.H. nadozioù; J.G. fleur-pod. g. géraniums.

fleur-an-anaon anv-stroll. kel.14, 15. gw. R.H. acur-  
vleunienn; S.S. bleuniou-kala-goañv; J.G. bokedoù-an-  
Hollsent. g. chrysanthèmes.

Evezhiadenn : Diwar an anv "fleur-an-anaon" e kredan  
kinnig evit ar yezh unvan : BLEUNIYOU-AN-ANAON.

fleur-ar-Werc'hez anv-stroll. kel.10, 17. gw. J.G. fleur-  
ar-Werc'hez, bokedoù-ar-Werc'hez. g. stellaires.

Evezhiadenn : Evit ar yezh unvan e kinnigan : BLEUNIYOU-  
AR-WERC'HEZ.

fleur-sant-Joseph anv-stroll. kel.1, 2, 10, 14, 15, 17.

gw. R.H. foen; bokedoù-laehz-ribod; bokedoù-santez-  
Nonna; bokedoù-sant-Jozef; roz-kamm. J.G. bokedoù-  
sant-Jozef. g. jonquilles, narcisses.

kinnigadenn : BLEUNIYOU-SANT-JOZEB.

fleur-sant-Erwan anv-stroll. kel.14, 15. gw. R.H. pivoena;

J.G. bokedoù-sant-Erwan. g. pivoines.

kinnigadenn : BLEUNIYOU-SANT-ERWAN.

Evezhiadenn : Ar vleunienn-mañ a vez difluk da vare  
gouel Sant Erwan.

fleur-kaoc'h-saout Taraxacum officinale anv-stroll.

kel.1, 2. gw. R.H. c'hwervizon; louzaouenn-staoter;  
Jarl Priel : piz-tonton. g. pissenlits.

{ fleur-an-hañv anv-stroll. kel.1, 2.

{ fleur-amandez anv-stroll. kel.14, 15.

{ fleur-amann anv-stroll. kel.10.

{ (fleur) bara-'mann anv-stroll. kel.10.

gw. R.H. bleuñv nevez, bokedoù-laehz, bleuniou-nevez;  
J.G. bokedoù-an-hañv. g. primevères.

{ bouton-mae (l. boutoned-mae) anv gourel. kel.18 (Douarnenez).

{ fleur-amann anv-stroll. kel.1, 2. gw. R.H. pav-bran, pav-  
yar. g. boutons d'or.

fleur-(bord)-an-aod anv-stroll. kel.5, 6, 8, 9, 10.

g. oeillet d'Espagne, jonc marin.

fleur-koukou Endymion non-scriptus. anv-stroll. kel.1, 2,

10. gw. R.H. louzaouenn-ar-goukou; J.G. bokedoù-  
koukou. g. jacinthe des bois, "coucou", "clochettes".

roz (un. rozenn) anv-stroll. kel.1, 2, 3, h.a. g. roses.

{ roz-ki (un. rozenn-gi) Papaver rhoeas. anv-stroll. kel.1,  
2, 3, 4, 10. gw. R.H. roz-aer, roz-ki (= "églantines").

{ roz-kog (un. rozenn-gog) anv-stroll. kel.10. g. coquelicots.

rozuku (un. rozukuenn) anv-stroll. kel.3, 4, 5, 6, 8, 9, 10,  
13, 14, 15, 17. gw. R.H. roz-sinkl, rozinil, rosku;  
S.S. rozinil. g. souci.

lili (un. lilienn) anv-stroll. kel.1, 2. gw. R.H. lili.  
g. lis.

elestr (un. elestrenn) anv-stroll. kel.10, 14, 15. dist.  
elez, elest. gw. R.H., S.S. elestr. g. glañeuls.

brulu (un. bruluenn) Digitalis purpurea. anv-stroll. kel.17.  
gw. R.H., S.S. brulu. g. digitales pourpres.

elvezenn (un. elvezennenn) Raphanus raphanistrum. anv-stroll.  
kel.1, 2, 3, 4, 8, 9, 10, 13, 14, 15, 17. gw. R.H.  
elvezenn. g. revenelle.

sanef Sinapis arvensis. anv-stroll. kel.1, 2. dist. :  
zañ-naf. g. moutarde sauvage.

louzaouenn-ar-groaz anv gwregel. kel.1, 2, 10, 14, 15, 17.  
gw. R.H. barlen, louzaouenn-ar-groaz, kroazig; J.G.  
louzaouenn-ar-groaz. g. verveine.

{ louzaouenn-ar-staoterez Parietaria officinalis. anv gwregel.  
{ kel.8, 9, 10, 14, 15.

{ louzaouenn-ar-gravel anv gwregel. kel.10. g. pariétaire.  
Evezhiadenn : mat evit kleñvedoù ar c'hweshigell. kel.10.

{ laezheg (l. laezheged) anv gourel. kel.14, 15.

{ askol-laehzek (un. askolenn-laehzek) anv-stroll. kel.1, 2,  
10.

{ chikore-laehzek anv gwregel. kel.10. gw. R.H. lezhenn,

staoñ-c'had, louzaouenn-al-laezh; J.G. askol-lâseg ;  
tuc'h-moc'h. g. laiteron.

